

D'hon soudarded maro

M'ho salud, « monumant » brezel,
Ha c'houi da gentan, kroaz santel,
Gant hanoiou hon zoudarded
Warnoc'h tro-dro en aour hadet.

Tud dispouren, kreiz ar brezel,
Ar Vretoned, betek mervel,
Deus stouvet hent d'an enebour
D'an Alamant kri ha treitour.

Izel izel stouomp hon penn
Dirak o hano, hag ouspenn,
Troomp hon c'halon d'o c'haret
Muioc'h vit biskoaz ha bepret.

Roet deus o gwad, o bue
Da zifenn kaoz ar wirione ;
Ar zonz ane dle chom bepred
En hon c'halonou kizellet.

Harpet an eil 'skoaz egile,
Hon zoudarded, re-all gante,
Deus goneet kaeran viktoar
Zo bet gwelet war an douar.

Hep Dpue, an den n'hell netra ;
Dorn-ha-dorn gantan c'hel pep tra ;
Gantan chomomp holl unanet
Ha peoc'h etrezomp vo bepred.

Gloar eta d'hon holl soudarded,
D'ar re veo ha d'ar re lazet,
Da gement 'oa a-du gante,
Hâ, da genta, gloar da Zoue !

EUR BREIZAD.